



GOUEL MARIA MIZ DU



Bi- ha-nik c'hoaz, yaouankik flamm, Hag he dor-nig e
He spe-red 'zo leun a fur-nez, He c'ha-lon leun a
Gant Ma-ri des- kit, bu-ga- le, En em rei a-bred



dorn he mamm, Ma-ri, e- nor bro Is- ra-el, A
ga- ran- tez, Heñ-vel mat eo ouz ar ste-red A
da Zou- e; Des-kit ganti e zer- vi-cha: An



gerz laou-en d'an Templ santel.
oa ske-dus a- vec'h krouet.
a- bre- ta vo ar gwella.

I



Bihanik c'hoaz, yaouankik flamm,
Hag he dornig e dorn he mamm,
Mari, enor bro Israel,
A gerz laouen d'an Templ santel.

Diskan


Nag hi 'zo koant, merc'hig Anna,
O tont d'an Templ d'en em ouestla,
D'en em ouestla, korf hag ene,
E templ Sion, e ti Doue !

III


Bihanik eo, n'he deus gwelet
Nemet teir gwech e Nazared
An deliou glas, ar bleuñv nevez
Goude ar goañv o tont er gwez.



Nag hi zo koant, merc'hig Anna, O tont d'an Templ d'en



em ouestla, D'en em ouestla, korf hag ene, E templ Si-



-on, e ti Doue

III

Bihanik eo ha koulskoude
He c'halon holl 'zo da Zoue:
Dreist pep unan, en he zri bloaz,
Dreist an Elez eo leun a c'hras.

IV

He spered 'zo leun a furnez,
He c'halon leun a garantez;
Heñvel-mat eo ouz ar stered
A oa skedus a-vec'h krouet.

V

Gant Mari, deskit, bugale,
En em rei abred da Zoue;
Deskit ganti e zervicha:
An abreta 'vo ar gwella.

(Eus Kantikou Miz Mari
an Ao. Guillou.)